

Red e vezo avertissa an oll ostichen
Da viret na deufent da loja ar filouterien.

Moris Follezour, 20 mars 1851.

(1) Ms : eun ; lire : an.

Jannet ar morvan. Plac'h ar mesgouez

en neuz Komposet eur chanson da plac'h ar mesgouez
en deus gwerzet e chontel evit mond dar bardon
Da brena per ag avalou da potret e c'hanton.

Dalit tu potret yaouanq dalit kemerit per
ar potret à levere nen devoant ket afer

Ag i monet ahane ag en eur groc'hmoulad
a re man kouskoude mezi are man a voa per mad.

Ag i monet ahane da plac an avalou ruz
ar re man dianas emezi no c'heus ket da refuz

Tavit Janet ar Morvant tavit na welit ket
Dond a rei Guillou ar Moal eur wech c'hoas d'o goelet

Na pa vezo en e kaera en devezo c'houec'h godel
Mar de red karga ar reze e ielo gwers ar gontel.

Anaïc Cozic, 9bre 1850.